



Kann@del UGB

Keneiled ker,

Degouezhet omp e-kreiz ar bloavezh skol, erruet oa poent bras da vurev UGB kelaouiñ hec'h izili war ar pezh a zo bet graet dibaoe miz Gwengolo. Ur sapre sammad labour a zo bet sammet, memes ma ne vez ket gwelet ken aes a-se.

An astenn d'ar gevrat-steuñv Stad-Rannvro

Aet omp e darempred gant an deskadurezh stad hag ar Rannvro a-benn kuzuliañ anezho war ar fed aozañ an astenn d'ar gevrat-steuñv Stad-Rannvro. An destenn-se a vero an deskadurezh divyezhek evit ar seizh vloaz a zeu. Ar gevrat kozh a oa echu dibaoe 2006 ha « La nouvelle loi d'orientation de l'école primaire » a lâr ne c'hell bezañ deus un deskadurezh divyezhek nemet ma vez sinet ur gevrat etre ar Stad hag ar Rannvro e Breizh velestradurel hag etre ar stad hag an departamant el Liger Atlantel. O c'hortoz ar gevrat a zeu emamp e-maez al lezenn neuze, dreist-holl dre ma n'eus plas ebet evit ar yezhoù rannvroel e-barzh ar « socle commun de compétences et de connaissances » !

Dañjerus eo bezañ e-maez al lezenn, evel-just ne vo ket lamet an deskadurezh divyezhek abalamour d'an abeg-se, re a drouz a rafe, met un digarez eo memestra evit nac'hañ e vije aozet ar staj-mañ staj, evit nompas leuskel plas d'ar brezhoneg en ur raktres-skol,... Traoù ne vezont ket gwelet gant an holl dud, hag a dremen hep ober trouz.

Da welet bremañ petra a zo bet aozet etre servijoù ar Stad hag ar Rannvro... 'M eus aon e rankomp kregiñ diouzhtu da brientiñ al labour war an treuzkas galloudoù deus ar Stad d'ar Rannvro evit an deskadurezh ma hon eus c'hoant e yafe an traoù war-raok evit ar brezhoneg er skolioù !

Al lec'hienn internet o vezañ nevesaet (ugbrezhoneg.com)

Emaomp o nevesaat al lec'hienn a-benn lakaat anezhi da vezañ ur benveg kelaouiñ met ivez un deuliaoueg pedagogel e lec'h ma c'hello pep hini lakaat ar pezh a ra en e gorn, hag evel-just, implij ar pezh a vez savet gant ar re all. Re alies hon eus bet troet ar memes levrioù hag ar re all pe kollet amzer oc'h ober un dra graet mil gwezh dija. An teulioù a vo

kinniget en ur stumm a c'heller kemm (.doc hag all), e giz-se e c'hello pep hini ober gant al live yezh en deus c'hoant pe implijout an teul evel un diazez a-benn sevel an hini en deus c'hoant.

Al lec'hienn internet nevez a vo ivez un doare nevez da gelaouiñ an izili, kaset vo nebeutoc'h a baper ha moaien vo d'ho kelaouiñ en un doare primoc'h hag aliesoc'h war oberiantizoù UGB met ivez war oberiantizoù an ensavadurioù hag ar c'hevredigezhioù a zo tro-dro deomp, dre al lanvioù RSS da skouer (kit war al lec'hienn evit gwelet petra eo ar petra-din-me se). Pep ezel a c'hello ivez embann e soñj war al lec'hienn ivez. Kaout ur chomlec'h postel a vo a-bouez bras neuze evit bezañ kelaouet, kaset e vo ul lizher da bep ezel pa vo prest al lec'hienn evit gwiriekat e chomlec'h postel.

Ur c'houlzad bruderezh war an deskadurezh divyezhek

Emaomp o labourat gant bodad an deskadurezh Kuzul Sevenadurel Breizh (UGB, Diwan, Dihun, Div yezh) war ur c'houlzad bruderezh war an deskadurezh divyezhek a vo e penn kentañ miz mae. Tro po da welet pennadoù er c'hazetennoù, skritelloù hag ur filmig kelaouiñ a vo skignet war Frañs 3 ha dre internet. KSB a zo o vont da sevel skritelloù a vo kaset d'an emglevioù bro, kit da wiriekat hag-eñ eo bet kelaouet emglev ho pro ma peus c'hoant lod anezho.

Sevel linenn-stur nevez UGB war an opSION brezhoneg en eil derez

Ne ya ket mat gant an opSION brezhoneg e kalz a skolajoù ha liseoù, amañ eo bet distrujet gant ar vizio, aze eo peogwir ne vez ket kelaouet mat ar vugale hag o zud... Dav eo kaout un diskoulm ! Sellet hon eus deus ar skolajoù e-lec'h ma yae mat an traoù ha setu ar pezh a zo deuet war wel : an efedusañ eo lakaat ar re 6vet hag ar re 5vet da gaout un eurvezh sevenadur Breizh ha brezhoneg dre ret pep sizhun ha kinnig dezho div eurvezh opSION e 4re. Aze e vez kendalc'het gant ar brezhoneg gant kalzik a skolajidi mennet mat.

Tizhout an doare aozañ-se a c'hellfe dont da vezañ linenn-stur UGB evit an opSION en eil derez. Ezhomm hon eus deus hoc'h alioù war an dra-se, a-du oc'h gant an doare-se pe tamm ebet ? Soñjoù all 'peus pe klot a ra gant ar pezh a soñjit ? lârit deomp ! (kasit ho posteloù da ugb.mail@free.fr)

Kregiñ gant ar saozneg adalek ar CE1 en deskadurezh divyezhek, ur chañs pe un ampech ?

Adalek ar bloaz a zeu e vo kroget gant an deskiñ yezhoù estren adalek ar CE1, petra soñjit ?

A bep seurt arguzennoù zo. Setu amañ div : Gwelloc'h eo kregiñ an abretañ posupl hag ur chañs e vo dre ma vo maget pep yezh gant eben (E skolioù divyezhek katolik zo e vez kroget adalek penn kentañ ar skol-

vamm gant hentenn ARTIGAL <http://www.dihun.com/artigal/methode.htm>). Pe, deus an tu all e soñjit eo gwelloc'h kreñvaat ha staliañ mat ar barrezhioù lavar gant ar brezhoneg d'an oad-se, hag e vo disteraet plas ar brezhoneg gant an dra-se.

Ezhomm hon eus deus ho skiant prenet ha deus ho alioù war an dra-se, kasit posteloù deomp ! (ugb.mail@free.fr)

Teulioù stag

Stag ouzh ar postel-mañ e kavoc'h :

- Fichenn emezelañ 2006-2007 : Evit ar re n'o defe ket emezelet c'hoazh, disoñjet en ober, pe me oar... Ezhomm hon eus diouzhoc'h.
- Kompren al lizherennoù : Geriaoueg ar sigloù. Ma vank un nebeud, roit dimp da c'hoût evit klokaat.
- **UGB :**
 - o Bodadeg-Veur 28.10.06 : Gerig J.M. Branelleg aet a brezidant.
 - o Ar c'huzul-merañ
 - o Lizher d'an Drian 19.10.06
 - o Respont an Drian 14.11.06
 - o Lizher d'ar rektor 02.2007 a-raok CALR miz genver (Conseil académique des langues régionales)
- **Darempredoù diavaez :**
 - o KSB : Bodad Deskadurezh Uhel en Brezhoneg, L. Kergoad.
 - o Akademiezh : Karta ar c'hevrennoù divyezhek ha kelenn direkt ar yezhoù rannvro.
- **Sifroù :**
 - o Enklask Ofis ar Brezhoneg diwar distro-skol 2006
 - o Kartenn skol 29
 - o Kartenn skol 22 (ma emañ ganeoc'h ar roll evit an tri departamant all, kasit deomp)
 - o CM2 divyezhek hag a gendalc'h er skolañoù 22, 29 en 2006
- **Dilennadegoù**
 - o Goulennaoueg d'an danvez prezidanted
 - o Respont an danvez prezidanted
 - o Pennad an Télégramme